

# EMSAV

*Obligations : - en fait de l'Etat (6)  
- Resonance (6)*

mmmm mm m mm m mm m  
mm mmm mm mm m mm m  
mm mmm mm mm m mm m  
mm mm m m mm m mm m  
mm mm m m mm m mm m  
mmmm mm m mm m mm m  
mm mm m mm m mm m  
mm mm m mm m mm m  
mmmm mm m mm m mm m

KELACUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 16 - Ebrel 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

T a o l e n n

Emdroadur ar politikerezh broadel en Iwerzhon  
e derou an ugentved kantved ha roll an I.R.B. . . . . p. 99

An Emsav hag ar Vro (1) . . . . . p. 107  
Lizheroù p. 107, Danevelloù obererezh p. 111,  
Lennadennoù p. 113, Darvoudoù p. 116

Notennoù armerzhel (14), ar c'hred . . . . . p. 119

## EMDROADUR AR POLITIKEREZH BROADEL EN IWERZHON

## E DEROU AN UGENTVET KANTVED HA ROLL AN I. R. B.

Ar politikerezh zo heñvel a-walc'h a-wechoù ouzh un hentadenn a-dastorn a vez kaset da benn a zeiz da zeiz, hep rakwel pell war an dazont. Seurt stadadur a c'haller ober e-ser politikerezh Iwerzhon e-tro bloavezhioù kentañ ar c'hantved-mañ (1).

Etre 1891 (marv PARNELL) hag emsavadeg Pask e 1916, da skouer, e hañvale an emsav brogar en Iwerzhon bezañ rannet ha bruzhunet e luskadoù liesseurt, hep liamm hewel ebet etrezo. Diouzh un tu e kaved strollad an Home Rule a oa deuet a-benn da reoliñ an dilennadegoù a veze graet er vro dindan atebegzh ha beli ar Stad saoz. Ar strollad-se a c'houlenne evit Iwerzhon un emreolerezh damheñvel ouzh an hini a oa enskrivet war roll ar M.O.B. nevez 'zo. Ne oa anezhañ enta nemet un nerzh politikel saoz dacust da gement a embanne a-hend-all diwar-benn e vroadelouriezh iwerzhonat; ouzhpenn-se ne oa nemet saoznegerion ennañ petra bennak na rae van ar renerion da harpañ ar C'hevre Gouezelek, bepred avat evit an hevelep arbenn a verzh en dilennadegoù.

En e gichen hag o skorañ e bolitikerezh edo Kevre al Labour douar renet gant DAVITT. Roll ar c'hevre-mañ oa damheñvel ouzh hini c'hweluniadoù ar gouerion e Breizh, nemet ne oa ket stag kement evelato ouzh an emgav politikel estren. Forzh penaos avat, darnel e oa e stourm ha n'en doa e gwirionez liv broadel resis ebet.

Muioc'h a bouez a ranker reiñ d'ar C'hevre Gouezelek a voe diaz-ezet e 1893 hag a voe renet dreist-holl gant Dubhglas DE HYDE. Ennañ e labouras darn eus brogarourion wellañ Iwerzhon, evel Padraig Mac-PIARAI, - hemañ a-du-rall a savas ar c'hentañ skol-etre iwerzhonek, Skol Sant-Enda) ha Eoin MacNEILL Anavezet mat eo roll ar C'hevre Gouezelek a-raok ar brezel bed kentañ : krouiñ a reas kantadoù a



a skolioù gouezelek dre ar vro. Ret eo notañ koulskoude ez embanne e renerion e oa dibolitikel o strollad, - a-benn aotren da vrogarourion iwerzhonat e karg gant ar Stad saoz kas da benn un tamm labour brogar hep bezañ trubuilhet e oa bet savet ar C'hevre, evit un darn. Arabat souezhiñ enta mar kaved ennañ un doare rannvroelourion na c'houlent ket klevout kel a emrenerezh.

E-tal d'ar C'hevre Gouezelek hag o harpañ e labour e oa strolloù ha tolpadoù a bep seurt. Da skouer argKevredigezh Atletek Gouezelek, a glote mui pe vui e vennad gant hini Skaouted Vleimor e Breizh, nemet e oa kalz ledetoc'h ar c'henurzhiadur iwerzhonat eget an hini breizhat.

Erfin, ret eo ober anv eus ar c'hevredigezhioù lennegel a bep seurt a oa awenet gant ar spered broadel, a gaved skignet dre ar vro.

Liesseurt ha rannet meurbet e oa enta an Emsav en Iwerzhon. Darn eus ar vrogarourion a glaskas kreizennañ, unvaniñ ha reoliñ anezhañ. Da urzhiañ o labour ec'h en em vodjont en Irish Republican Brotherhood.

E gwir e oa mennet an I.R.B. da vezañ ur framm kentoc'h eget ur strollad. Kavout a raed ennañ un nebeut kantadoù a stourmerion diuzet dre gendibab hag a glaske sellout outo o-unan evel Dael ha levierzh gwirion ar vro. Kuzh avat e chome ar framm-se. Gwerediñ a rae enta dre hanterouriezh strolladoù digor diazezet war-eeun dindan e atebegezh pe hini strolladoù all broadel a-c'houez d'an holl ma tileurie enno "izili touet" eus ar framm d'o reoliñ.

Da skouer, he doa an I.R.B. aozet dre ar vro ur rouedad Literary Societies ha Kelc'hioù Rezid a oa karget da duta izili nevez d'an Emsav. Séan MacDIARMADA a rae war o zro. Pa veze bet stummet an izili-se e vezent lakaet da labourat er c'hevredigezhioù all, dindan atebegezh an I.R.B..

Plediñ a rae an I.R.B. ivez gant danzen displegadurioù bras a c'halle kaout ul levezon war veno foran ar vro. Lakaomp e voe e 1898

prientet gant an I.R.B. lidadur kantved-ha-bloaz emsavadeg Iwerzhoniz Unanet.

Muioc'h a reas an I.R.B. avat adal 1899. Embann a reas kazet-  
ennoù da skignañ ar mennoz broadel. Er bloaz-se end-eeun e teuas  
er-maez evit ar wech kentañ The United Irishmen. Arthur GRIFFITH ha  
William ROONEY a oa bet lakaet da renerion anezhi. Evit gallout  
stourm ivez war-eeun war an dachenn foran e lakaas en he flom ur  
gevredigezh digor a voe anvet Cumann na nGadheal hag a voe rakkerzher  
da Sinn Féin. Kerkent e krogas ar strollad nevez da enebiñ ouzh  
strollad ar parlamantourion, e 1902; goulenn a reas diganto chom  
hep mont da sezañ a London, o kemer skouer Hungariz o doa lakaet o  
c'hannaded da venel e Budapest e-lec'h divroañ da Wien ha kemer  
perzh e Breudoù an Impalaeriezh.

War-dro ar mare-se ivez e voe kempennet an National Council,  
anvet c'hoazh Kuzul an Tri-c'hant a fougase da vezañ gouarnamant  
e-devoud Iwerzhon. Kuzh e oa ezeladurezh ar c'huzul-se, evel hini  
an I.R.B., hag evel houmañ ivez ez oberias dre hanterouriezh stroll-  
adoù digor, Sinn Féin (Hon-Unan) pergen a voe e zileuriad dirak ar  
meno foran.

Renet e voe Sinn Féin gant GRIFFITH daoust ma ne oa ket mui  
hemañ ezel eus an I.R.B.. Stourm a reas evit un Iwerzhon dieub a  
gernerfe da ziazez ar Stad Bonreizh iwerzhonat 1782. Ret eo da Iwerzh-  
oniz, emezañ, stourm war diriegezh o bro end-eeun, da lavarout eo  
pakañ krog da gentañ en amaezhierzh lec'hel, war dachenn ar barrez,  
ar rannbarzhioù hag ar rannvroioù. En anv ar Vonreizh-se ivez e  
c'houlenned ma ve broadelet ar bankoù hag erbediñ a raed sevel  
leziou-barn iwerzhonat.

Ret eo anzav ne voe ket deuet ken mat-se d'ar foran hevelep  
kinnigadurioù. E gwir e oa 1782 gwall bell diouzh Istor kempred  
Iwerzhon d'ar mare ha giz kozh e hañvale bezañ Bonreizh 1782, -  
koulz e ve d'ar Vrezhoned adkemer darn eus arc'hadurioù ar Chouanted.  
Ar raklun-se a-hend-all zoken n'en doa chañs ebet da vezañ sevenet

o vezañ ma nac'he GRIFFITH ober gant an nerzh, - betek 1914 ac'hoel.

Gwashoc'h fazi c'hoazh a reas GRIFFITH. Gwallegañ a reas plediñ gant an dispac'h kevredigezhel a vije bet da gas da benn er vro (LALOR avat a brezege evit an dispac'h-se). Erfin hag ouzhpenn ez enebe ouzh ar C'hevre Gouezelek dre ma wele ennañ un oberenn darnel, - da nebeutañ betek 1910.

Padal e voe efedus ar stourm a renas Sinn Féin evit disteraat roll strollad ar parlamantourion a zegemere ezelegezh Iwerzhon en ur parlamant impalaeriezhel saoz. A-hend-all, pa voe bet adunvanet gant ar C'hevre Gouezelek e kreskas c'hoazh e levezon. Dioutañ ivez e tiwanas hag en em zistagas oberennoù dishual. Bulmer HOBSON, da skouer, a savas ur gazetenn nevez anvet Irish Freedom; enni e skrivas Padraig MacPIARAI, P.S.O'HEGARTHY, Terence McSWINEY, danvez maer Corcaigh. Ar re-mañ ivez o doa da bal pennañ stummañ un dibab a stourmerion kentoc'h eget tizhout ar meno foran dre vras.

Evel-se edo an traoù pa voe mouezhiet e London al lezenn diwar-benn an Home Rule. Kentizh e savas a-enep dezhi Orañjiz renet gant GARSON; kregiñ a rejont da zastum armoù ha d'en em c'hourdoniñ evit ar brezel. Da herzel outo e tivizas paotred an Home Rule pourchas armoù d'o zro hag aozañ o nerzh-lu-int; Eoin MacNEILL, broadelour eus ar C'hevre Gouezelek a voe lakaet e penn. Ur galv a voe graet da ezsoudarded ha da ezofisourion eus al lu saoz da emezelañ er vezin-se. Dont a reas ivez anaouderion eus Na Fianna Eireann (skaout-ed vroadel) diazezet e 1910 gant Bulmer HOBSON, Séan MacGARRY, ar gontez MARKIEWICZ.

Bec'h a savas avat evit gouzout piv a reolfe an nerzh-lu-se. REDMONT, paotr-araok ar parlamantourion a c'houlennas dileuriañ ugent-pemp eus e gannaded er bodad-ren. HOBSON, goude argilañ hag o tisentiñ ouzh an I.R.B., a asantas d'ar goulenn-se. Diwar neuze e voe ezwiriet ha dizornet eus e garg en I.R.B. end-eeun. An I.R.B. en abeg dezhañ evit darn enta ne oa ket deuet a-benn da reoliñ korf



ar youlidi en e bezh. Padal, dre hanterouriezh Padraig MacPIARAIS, ez arnodas ar framm broadel levezonañ tamm pe damm ar c'henurzhiadur bellourel-se.

Seurt kenober avat etre dispac'herion ha kempennourion ne c'halle ket padout pell. Hep dale e reas REDMONT an dibab a glote gant e vennadoù politikel : mont a reas a-du gant ar Saozon er brezel a oa o paouez tarzhañ. E gwengolo 1914 e roas da c'houzout e lakae nerzh ar youlidi e gwazoniezh Bro-Saoz. Kant-ugent mil youlad emouestlet dindan renerezh REDMONT a yeas enta d'en em gannañ evit ar Saozon war an talbenn e Frañs. Dek mil hepken a chomas a-du gant ar vroadelourion hag a gavas mat an embannadenn sinet gant un toullad brogarourion diblegus : Eoin MacNEILL, HOBSON, MacPIARAIS, Thomas MacDONNAGH, Déan FITZGIBBON a enebe ouzh rannadur ar vro hag engalv Iwerzhoniz d'al lu saoz.

Ar re-se eo a zlee prientiñ emsavadeg Lun Fask. Ret eo notañ evelkent ne oa ket bet meizet an emsavadeg-se gant an atebeion evel un embregadenn romantel dic'hoanag. Darn, evel HOBSON, a gave dezho e vefe trec'het pe da vihanañ gwall skoilhet ar Saozon gant an Alamaned. Evit sevel lu an emsavadeg en em harpjont war dilerc'hioù kenurzhiadur ar youlidi ha n'o doa ket kredet ar Saozon o dizarmañ war an nebeut kantadoù a emouestlidi micherourion tutaet gant O CONNAIGHLE, ar brogarour sokialour iwerzhonat. Tra ma aozed dre guzh an emsavadeg-se avat e klaske ar vroadelourion levezonañ ar meno foran gant urzhiadurioù digor a strive e sell da amkanioù resis ha tost ha na ziskouezent ket bezañ stag ouzh ar pal merket d'ar framm kuzh e-unan.

#### Evezhiadennoù.

Dezrevelladur Istor Iwerzhon e derou ar c'hantved a ziskouez mat sioù an Emsav hep prouiñ e c'halled tec'hout diouzh ar sioù-se penn-da-benn : an dud n'int ket mestr a-grenn d'an darvoudoù n'eus forzh penaos. Padal ez eo mat bezañ emouez ouzh ar gwariadurioù a

c'hell diheñchañ un emsav ha mirout outañ a zisoc'hañ.

Ar c'hudennoù bras a save dirak ar vroadelourion en Iwerzhon e derou ar c'hantved oa hini ar vroadelezh end-eeun ha hini an unded.

Klasket e voe gouezelekaat an Emsav dre ar C'hevre Gouezelek (Conradh na Gaeilge) ha Skol Sant-Enda. Gwallek e chomas e meur a geñver an embregadennoù-se. Ar C'hevre Gouezelek, da skouer, a gasas da benn ul labour divent en Iwerzhon (kenurzhiadur brezhon ebet betek-henn ne c'hell bezañ keñveriet outañ evit ment al labour ac'hoel) a hañvale re alies bezañ sevenadurel-rik; ennañ a-hend-all e kejed gant tud a oa saoz a spered ha na felle ket dezho plediñ tamm ebet gant ar politikerezh.

Diouzh un tu all, daoust ma oa Skol Sant-Enda awenet gant ur spered broadel gwirion, ne oa ket, dre arbennoù kalvezel hag en abeg da rakvarnioù o ren er grez-se, evit sevel dreist live an divyezhegezh. Ur yezh isdiorreet eo enta a veze kelennet gant ar C'hevre koulz ha gant Skol Sant-Enda. A-se e oa diaes d'an Emsav prientiñ un deskadurezh wir ouezelek en deiz ma voe savet Stad Iwerzhon. Ar mank-se a voe gwall donkus evit emdroadur gouezelek ar Stad-se a-c'houdevezh.

Evit pezh a sell ouzh unded an Emsav e weler kenkoulz-all pegen diaes eo bet da Iwerzhoniz diskoulmañ ar gudenn-se. Politikerezh an I.R.B. koulz ha hini an National Council ez eo bet reoliñ en ur stumm bennak an aozadurioù hag ar c'hevredigezhioù brogar all dre zileuriañ izili kuzh enno a labour evel lerennoù-rod, hag ivez klask heñchañ ar meno foran dre grouiñ strolladoù a bep seurt. Gwiriañ a ranker avat ne efedas ket ar c'haderezh-se kement ha m'o defe gortozet lod moarvat. Un emsav dispac'hel ne c'hell ket distr-oadañ ar strolladoù kempennour er-maez eus an dispac'h end-eeun. Evel-se en Iwerzhon ne voe skarzhet da vat strollad ar parlamantourion nemet antronoz an emsavadeg, - hevelep saveleñ a c'haller stadañ war ur bazenn ha gant ur vent all e Rusia e-lec'h ma ne drec'has ar Volcheviked nemet dre an dispac'h e-unan. Betek neuze ne



voe ket ar vroadelourion evit mirout zoken ouzh REDMONT a zaskoriñ 90 % eus korf an Emouestlidi da Vro-Saoz. Dre an devoud-se e c'haller dezvarn dres ment al levezon o doa ar vroadelourion er vro d'an ampoent.

Ur si dibardon all en doa ar framm a glaske ar vroadelourion lakaat en e blom ha hennezh hon eus meneget meur a wech : saoznek e oa; a-se e oa techet da sellout ouzh ar C'hevre Gouezelek, a zleje bezañ bet ar gwir framm, evel ouzh un oberenn darnel, hag orel koulz lavaret.

Div gentel all a c'haller tennañ evelato eus studi ar prantad-se eus Istor Iwerzhon. Gwelout a reer dagentañ ez eo emdarzhek evit darn diorreadur an emskiant vroadel, stag ma'z eo ouzh ur c'hendeg-ouezh armerzhel-kevredigezhel dibar. Fellout a ra dimp lavarout dre se emañ an emskiant-se en arvar d'en em stagañ ouzh aozadurioù disol evel di'bal keit ha ma n'eus dinodet aozadur all ebet gouest da vleniañ ar bobl d'an emouiziegezh politikel.

M'en deus ar meno foran heuliet ar vroadelourion en diwezh ez eo dre an arbenn ma ouezas ar re-mañ diskouez ur youl start da seveniñ un uhelvennad a glote dre vras gant ar pezh a hete ar bobl hep gouzout dezhi fraezh. Ur stumm a bolitikerezh taer a c'hell enta dedennañ ha kreizennañ ar meno foran d'ur mare 'zo eus e emdroadur, - gant ma kloto ar politikerezh-se evel just ouzh ezhommoù ergorel ar boblañs.

#### Keñveriadur ouzh Breizh.

Disheñvel eo degouezh Breizh diouzh hini Iwerzhon o vezañ ma voe amparet ar saviad kevredigezhel en Iwerzhon gant un heskinerezh kravezel a zisoc'has da lemel digant broiz o gwirioù keodedel koulz ha perc'hentiezh o douar, - pezh na gaver ket e Breizh. Ouzhpenn-se e voe diboblet trumm ar vro da heul un naonegezh vras e-kreiz an 19<sup>t</sup> kantved.

Aes eo evelkent diverzout heñvelderioù etre an Iwerzhon eus derou ar c'hantved-mañ hag ar Vreizh eus an eil kard kantved. Hogos saoznekaet e oa poblañs Iwerzhon d'ar mare ma teraouas an Emsav gwiskañ ul liv broadel resis, evel ma'z eo tost gallekaet poblañs Vreizh hiziv. Du-hont evel amañ e oa bet krouet ur meni emskiant pobl gant ar stourm o doa ar gouerion ranket ren a-benn difenn o c'horvoderioù; c'hweluniadoù kouerion Iwerzhon o deus c'hoariet ur roll kevatal da hini c'hweluniadoù gounideion Breizh. Emañ CELIB hag ar poellgorioù armerzhel all eus Breizh en hevelep saviad hag ar strollad parlamantour iwerzhonat. Erfin, liesseurtiezh ha mesk an emsav yezhel hag al ledemsav e Breizh a denn a-walc'h da firbouch ar stolloù hag ar bodadoù stank ha liesdoare a yae d'ober Emsav Iwerzhon.

Kemer a c'hellomp da skouer an I.R.B. diouzh ma klaske degas un tamm unded en Emsav iwerzhonat. Diboell e ve avat drevezañ Iwerzhoniz e pep keñver. Diwall a rankomp dreist pep tra diouzh ar sioù a viras ouzh an aozadur broadel iwerzhonat a seveniñ ul labour efedus, ha diouzh an estrenyezhegezh pergen.

War ar marc'had, mar klaske an I.R.B. reoliñ hollad al luskadoù iwerzhonat, e chome diemframm e-unan, dic'houest da brientiñ ar Stad. Hevelep trevell, moarvat, zo diaes ha ne c'hell ket bezañ erounezet er-maez eus plegennoù ha hentennoù 'zo. Hogen Iwerzhoniz, an darn vuiañ anezho da vihanañ, ne hañvalent ket zoken merzout gwir bal ar stourm a renent, na diawelout ar reizhiad armerzh nag ar stuz kevredigezh a oa da ziazezañ en o bro. Deomp-ni eo diwall d'ober ken gwazh fazi hag int !

---

(1) Skoazell a gavo al lenner da studiañ Iwerzhon gant Al Liamm 120 1967, niverenn gouestlet hogos penn-da-benn d'ar vro-se.

## A N E M S A V H A G A R V R O ( 1 )

Gant an niverenn-mañ e teraouomp embann ur rumm nevez a bennadoù. Dindan an talbenn : An Emsav hag ar Vro e vo hiviziken dastumet tennadoù eus lizheroù, danevelloù labour ha kendaeloù, notennoù lenn, notennoù a-zivout an darvoudoù, en ur ger, kement testenn difluket eus buhez an Emsav hag ar Vro gouest da bourchas danvez d'ar preder politikel.

LIZHEROU

"Evit Breizh, harpañ a ran hag a rin al luskadoù "kaletañ" hag ar re gadarnañ. Din da welout avat, emañ pell diouzh ar poent ma vo anezho ur galloud politikel, da lavarout eo ur galloud gouest da lakaat harz da nerzhioù an estren. Gouest da sturiañ ar bobl pe kevrennadoù eus ar bobl. Abaoe 50 vloaz ez eus strolladoù kadarn ha kalet e Breizh. Koulskoude e chom an emskiant vroadel e Breizh kalz gwanoc'h eget e Kembre, Iwerzhon ha zoken Alba. Kembreiz o deus gouezet gounit trec'hioù politikel ha sevenadurel hag a laka anezho en ur par ma c'hellont gwelloc'h difenn o broadelezh egedomp. N'eus nemet un toulladig a gav pouezus ar gudenn "breizhveurat-pe-nann". En Iwerzhon, ar strolladoù o deus galloud - hag a viro ar galloud - n'int ket "sinnfeinat", lavarout a reer ez int prest da zistreiñ er c'hCommonwealth ma vefe ret evit adunaniñ ar vro. N'eus ket aze peadra da laouenaat. Sinn-Fein a zo kadarn, ha mennozioù dispac'hus o deus, met ne vezont ket harpet. Gant arver an armoù o deus c'hwitet 8-12 vloaz 'zo. () Sinn-Fein n'int ket c'hoazh 100 % a-du gant an iwerzhoneg : ne lavaront ket e fell dezho argas ar saozneg krenn-ha-krenn.

"Setu. Bez' e c'haller dibab etre bezañ glan ha rik ha dispac'hus ha bezañ hebleg, gwevn, o terc'hel d'an uhelbal met oc'h asantiñ kenober gant re all a zo disteroc'h o fal (hag implij anezho ma c'haller). Me a gred ez eo kevatal digemmesk ha gaonac'h. Ar vuhez a ziwan diwar zimezioù ma kav pep pried ned eo ket egile pe eben ken mat ha m'en dije karet.

"Evel just ne zimezer ket gant n'eus forzh piv. Kentoc'h eget dimeziñ ur strouilhenn pe unan divalav e chomer dizemez. Betek ma vo prouet din ar c'hontrol, ez on tuet da sellout ouzh



kement hini a ro e boan evit Breizh dreist-holl evel ur broadelour, un den hag a ro harp da adsevel Breizh. Dezhañ d'henn gouzout, d'henn anzav, pe nann. () E c'hellomp kavout mat pe fall o doare-ober, noazus zoken darn eus o zrezvarc'hadoù. Met daoust ha ne zougont ket da zerc'hel Breizh bev ivez ? ()

"Soñjal a ran ez eus labour e Breizh evit strolladoù a bep seurt, war bep live, darn o c'hefridi bezañ evel kraonelloù o prezeg un aviel rik, re all o hini "strabouilhañ", lakaat an dud da daeriñ. Mantrus e kavan da skouer gwelout n'eus strollad ebet gouest da dennañ an engroeziou breizhat a zo drouklaouen ha war-nes taeriñ bremañ muioc'h war an hent broadel. Se a zo taol 1961-62 adarre !" (13 03 68) EMVR-1

Emaomp a-du dre vras gant al lizher plijus-mañ. Un nebeut poentoù anezhañ a glaskimp resisaat koulskoude.

Akademek un disterig eo d'hor meno an daeladenn etre "bezañ glan" ha "bezañ gwevn". Pal ar brezel zo bezañ trec'h. War an dachenn avat, diouzh an degouezhioù e reutaer hag e laoskaer tro-ha-tro hervez ezhommoù ar gadoniezh, - da bep penngadour e stil emgann. Hogen hor penngadour, - an Emsav, - n'en defe chañs ebet da ziskouez e stil ma ne ve ket termenet dezhañ e bal gant ur resisted jedoniezhel ha lakaet ar genurzh da ren en e lu. Divrall e rank bezañ an daou amplegad-mañ, dibleg e rank chom an Emsav en o c'heñver mar fell dezhañ piaouañ an heblegded rekis war an tachennoù-emgann.

Kudenn bevennoù an Emsav zo savet ivez gant hor c'henskriver : "hag ur broadelour eo X pe get ?". Ar gudenn-se hon eus pleustret c'hoazh warni er pennad : Penaos anaout an Emsav war an dachenn ? (Emsav 7/168). Lavarout a raimp an dra-mañ ouzhpenn : arabat lakaat ur skritell war dud n'emaint ket a-du evit he dougen. Ne c'haller ket bezañ en un emsav evel ma vezer e kevredigezh ur riez. Er gevredigezh e vezer a-raok bezañ dibabet kemer perzh enni. Met dibab a ranker evit mont en Emsav, - ha paeañ ar priz uhel ampleget gant an diazezoù hag ar pal anezhañ. Anez en em douellañ, ne c'haller ket divizout emañ en Emsav tud n'o deus ket dibabet a-youl-kaer bezañ ennañ. Pe neuze ez asantimp da zaou seurt "emsaverion" : ar re a zo en Emsav evel tud, gant rat hag a-youl rez, hag ar re a ve ennañ evel traoù, hep fellout pe hep gouzout zoken dezho, hag a ve implijet

gant ar re all.

Anat eo n'eo ket seurt hitleregezh hek a zo e spered hor c'henskriver, met kentoc'h ar gweladur en deus endeo eus an Emsav evel eus ur gevredigezh, hag aze e savomp ivez a-du gantañ. An Emsav frammet, evel benveg-dieubiñ ar vro, ne c'hell ket an holl kemer perzh ennañ e pep mare, - ar re a gemer lec'h ennañ a-raok o c'houlz a denn dañjer warno ha war an Emsav. Hogen an Emsav evel egin ur gevredigezh vrezhon nevez zo kalz ledanoc'h e dachenn, - ennañ e tiverzer endeo liesseurtiezh ar gevredigezh riezal a vo. Hag anat eo e kemer perzh ennañ un niver bras a dud na vennont, na c'hellont ket bezañ en Emsav frammet : o oberoù, merket gant ur garantez dispis ouzh Breizh, emdarzhek ha dibal a-walc'h, dezho ul levezon bennak war zibun an darvoudoù, a c'hell prientiñ an hent d'an Emsav frammet.

"E kredan ne c'hellomp ket kinnig d'ar bobl kemeret a-vloc'h un diskoulm ha n'eo ket prest da zegemer war dachenn an armerzh. Dre vras ivez e soñj din e tleimp adkemer studioù Phlipponneau, C.E.L.I.B., ar c'hweluniadoù, h.a. evit diskouez na c'haller erounit an amkanioù erbedet ganto nemet e framm ur Stad vroadel vrezhon. C'hweluniadoù ar c'hounideion avat o deus ar muiañ a bouez. Hogen evelato, daoust ha n'eus ket amañ da ober un diforc'h etre ar c'hounideion etre pe vihan hag ar c'hourferc'henned ? E meur a lec'h e Breizh e kaver noblañsoù dezho 2 000 hektar bennak, lakaomp. Daoust ha war ar re-se en em harpimp ? N'eo ket lavaret ne zeuy ket ar re-mañ un deiz da harpañ an Emsav, hogen evel ma reas bourc'hizion b'Paris er c'hantved tremenet : bewech ma save un dispac'h e korvoent ar werin evit o mad-renkad-int. N'eo ket an dra-se ent-anat a hetomp e Breizh. Anat eo e rankimp en em harpañ war ar berc'henned vihan. Ar re-mañ avat a vefe techet muioc'h d'ar c'hengladekaad pe da vihanañ d'ar gevelouriezh. E-touez ar re-se eo e rankimp klask harperion.

"Ar pezh kasausañ a vo, ma tegemeromp ar frankizouriezh armerzhel, eo e vo ar Stad vrezhon e dalc'h ar gevalaourion evel ma'z eo c'hoarvezet mui pe vui en Iwerzhon. An dalc'h evidomp avat ez eo diazezañ start rezid ar Stad; en ur gouarnerezh frankizour avat ez eo ar gevalaourion mestr an armerzh hag a-se mestr ar Stad ivez e meur a geñver.

"Ne c'hallimp eta kinnig nemet diskoulmoù da c'hortoz war dachenn an armerzh. War hirdermen e rankimp empennañ hor rak-tresoù armerzhel (a-benn broadelañ an armerzh, dieubiñ ar Stad hag unvaniñ ar gevredigezh). Adal ma ne gemeromp ket warnomp



avat diskoulmañ diouzhtu ha war an taol kudenn an armerzh er vro-mañ (o vezañ ma kemerimp da ziazez hor c'hinnigoù ar meno foran evel ma vo bet stummet dindan an dalc'hidigezh c'hall) e ranker anzav e vo da gas da benn ul labour kelaouiñ ha sklerij-ennañ a-bouez war dachenn an armerzh adal ma vo bet diazezet ar Stad. Hogen daoust hag al labour stlenn-se a c'hall bezañ kaset war-eeun gant ar Stad mar fell deomp mirout na savfe a-enep dezhi gwiskadoù 'zo eus ar boblañs na gloto ket o mad gant hor mennadoù kevarzhelaat. Evidon ne gredan ket nemeur, hag en degouezh-mañ eo e sav kudenn ar foranelezh hag ar brevezelezh er vroad. Evit stummañ ar meno foran e rankimp kaout strolloù ha strolladoù a wir prevez, a leuriado ar gouarnamant hag ar Stad hogen n'o devo ket an hevelep savlec'h dezvel. A-hend-all, evit chom hep gwallañ ar meno foran ha mirout na zisoc'hfe hor buhez politikel da hentoù-dall a seurt gant ar re a zo o skoilhañ darn eus broioù Reter Europa er mare-mañ e rankomp kaout ur reizhiad vruderezh politikel liant a-walc'h. E-ser se e komz Emsav endeo eus aotrouniezh speredel. Hogen, war a seblant, ned eo an "aotrou speredel" nemet un hinienn. Penaos e c'hall levezonañ ar meno foran hag ar Stad ma n'en deus kenurzhiadur ebet a wir prevez d'e harpañ ? Pilpouserezh ne vo ken ober un "aotrou speredel" anezhañ mar en em gav e-unan, noazh ha dizifenn dirak ar Stad a vo tentet diouzhtu da serriñ e c'henou. Penaos reiñ ul lec'h resis hag efedus d'ar Profed er vroad hag er gevredigezh ? Emsav ne lavar netra diwar-benn se. ( )

"E gwirionez e soñj din e rankimp ober hor mad eus degouezhenn diseurt an dispac'h evit sevel diazezoù ar Stad hag an armerzh hep daelañ gant neb, diouzh ma vo gallus, evel just.

"Kenderc'hel da vougañ pep doare a eneberezh a-c'houdevezh avat a vefe arvarus. An eneberezh zo un azon mat. Gwaskañ warnañ a c'hallfe degas renerion ar Stad d'en em zallañ ha da lezel ur rumm dispac'herion direolet da ziwanañ : ar re-mañ avat a c'hallfe distrujañ ar Stad en diwezh. Kudennoù Spagn, Portugal, Roumania, Polonia, Tchekoslovakia a vefe da studiañ er c'heñver-se. An eneberezh digor hepken a c'hell reiñ tu da verzout ar c'henstokoù hag ar c'hleñvedoù kevredigezhel ha broudañ ar renerion d'o diskoulmañ pe d'o fareañ. Rak-se on a-du - a-benn ur pennad - gant un doare liesstrolladegezh a wir prevez ha digor. An tu nemetañ eo d'ar Stad da reoliñ ar c'henstokoù a sav dalc'hmat e diabarzh ar gevredigezh." EMVR-2

Lec'h an aotrouniezh speredel, ar "Profed", er vroad hag er gevredigezh, hor c'henskriver a laka aze e viz war vaen-touch ar Stadoù hag ar c'hevredigezhioù. Ne c'hell bezañ kempouezet galloud ar Stad nemet gant damant ar bobl d'he rezid. Met ne zamanter d'ar rezid nemet e-lec'h ma'z eus ur speredelezh virvidik, ha n'eus



a speredelezh nemet el lec'h ma'z eus ur c'hoant kreñv d'ar rezid. Mar deu ar speredelezh da vervel hag ar c'hoant d'ar rezid da vougañ, e vano ar Stad dic'halloud evit o adenaouiñ. Setu perak ez eo ken pouezus diorren ar gevredigezh vrezhon nevez evel ur gevredigezh marnaoniek a rezid, entanet gant ar speredelezh. An aotrouniezh speredel, e stumm hiniennoù pe e stumm korfoù kevredadel kenurzhiet, ne c'hell kaout pouez er gevredigezh nemet mar ren da gentañ er gevredigezh ur speredelezh wirion hag ur skiant lemm eus ar rezid.

### DANEVELLOU OBEREREZH

#### Digant ur gelenner eus Kelc'h Debauvais Roazhon

"E Gwengolo 1967 hon eus kroget d'ober bruderezh evit an Emsav dre ar bruderezh evit K.D.

"Dre ma felle deomp lakaat tud da zeskiñ brezhoneg hon eus diazezet ar bruderezh-se war ar yezh nemeti.

"Skolidi hon eus bet, o deus kroget da zeskiñ brezhoneg. An darn vrasañ anezho a gendalc'h, hag un darn vat a zeuio d'an Devezhioù Studi evit klokaat o anaoudegezh eus ar yezh.

"Mat eo deomp studiañ donoc'h ar bloavezh-skol-mañ, a zo bet gounidus-tre evit an holl.

"Dre hor bruderezh hon eus tizhet meur a seurt tud : tud o doa c'hoant deskiñ brezhoneg evit gallout divizout gant o zud kozh, gant an dud diwar ar maez; evit gouzout ar brezhoneg evel ur yezh all (ar saozneg da skouer, - emzalc'h studierion dreist-holl a glask klokaat o anaoudegezhioù war zanvezioù na studiont ket er Skol-Veur); tud all c'hoazh a felle deskiñ ar yezh peogwir emaint o chom e Breizh, peogwir ez int Breizhiz.

"Met seurt arbennoù anzavet gant an dud n'int ket fraezh. N'eo ket anat zoken dezho an abegoù o deus da ouestlañ amzer d'ar brezhoneg, da zeskiñ hor yezh. Klask a reont un dra bennak. Met ne ouzont ket petra.

"Ha n'hon eus ket skoazellet anezho da c'houzout resis ar pezh a glaskent. Goulennet hon eus diganto labourat; ha labourat kalz war ar yezh. Netra ouzhpenn.

"Daou viz goude derou ar bloavezh-skol hon eus kinniget dezho dont d'ober labourioù liestennerezh, met ar c'hinnig-se ne hañvale kaout liamm ebet gant ar pezh o doa bet d'ober betek neuze. Aes eo kompren n'int ket deuet, peogwir n'o dije ket desket kalz e-keñver ar yezh e-ser seurt dalc'hioù labour. Ouzhpenn-se, n'anavezent ket an dud o dije bet da labourat ganto nemet ar c'helenner a welont div eurvezh bep sizhun.

"An hevelep tra zo c'hoarvezet p'hon eus kemennet e vefe aozet emvodoù evito, ma vefe komzet eus an deskadurezh, al lennegezh vrezhon, armerzh ha politikerezh Breizh. Nebeud anezho a zo deuet daoust m'o doa respontet d'ur c'houlennadeg graet un devezhiennoù a-raok e vefent laouen o c'houzout muioc'h diwar-benn K.D., kudennoù Breizh, h.a. Met an dud a respont ya d'ur c'houlennadeg hep soñjal re, dre sevender; tud na c'hellent ket dont peogwir n'o doa ket amzer, met n'eo ket ar gudenn wirion. N'o doa ket c'hoant bras da c'houzout dreist-holl.

"N'int ket deuet kennebeut da gomz brezhoneg ganeomp, d'ar sadorn goude merenn. Koulskoude e vije bet splotus dezho e sell eus deskadurezh ar yezh war-eeun. Perak neuze ?

"Boas int bet da welout e K.D. kentelioù ha kentelioù hepken. Evito e oa K.D. ur skol ha nemet ur skol gant kelennerion ha skolidi. En doare-se eo e oa bet diskouezet K.D. dezho pa'z int deuet da enrollañ. Hag en doare-se eo bet buhezset K.D. gant ar skolidi hag ar gelennerion. Ar skolidi o deus klasket deskiñ mat ar yezh, ar gelennerion o deus klasket he c'helenn mat. Met se hepken.

"N'hon eus ket lavaret petra oa evidomp ar yezh, peseurt ster, peseurt talvoudegezh he deus e buhez ar vro. Hag ar skolidi n'ouzont ket. Kredet o deus marteze e kelennemp ar brezhoneg dre garantez evit ar yezh. N'hon eus ket klasket, ni kennebeut, gouzout petra oa ar brezhoneg evit ar skolidi, perak e teskent brezhoneg evit gwir, petore abegoù don o doa da labourat start a-walc'h war ar yezh. Re alies ez eo chomet an darempredoù war al live kelennerion-skolidi. Tud int. Bevañ a reont en ur gevredigezh pe klask a reont unan. Mennozioù o deus. Kizidik ez int ouzh traoù 'zo. Ha n'ouzomp ket ouzh petra.

"En hevelep doare n'hon eus ket diskouezet dezho ne oamp ket nemet kelennerion met tud a gelenne ur yezh a zo dezhi un dalvoudegezh vras evito dre ma'z eo o yezh, dre ma tle bezañ yezh Breizhiz dieub, yezh ar Stad Vrezhon.

"Ar skolidi n'o deus ket gwelet ar gevredigezh a oa dindan an anv K.D. pe, mar o deus gwelet, n'o deus ket klasket dont tre. Arabat henn rebech dezho.

"Kevredigezh K.D. a zo o tiwanañ. Klask a reomp he c'hrouiñ. Bresk eo c'hoazh. An dud a sant an ezhom d'en em skoazellañ, d'en em zifenn tost diouzh levezonoù estren a c'hallfe bezañ dañjerus eviti.

"Gant al labour ramzel en deus bet pep hini da ober n'hon eus ket bet amzer da welout e oa tud a oa prest marteze da zont d'ar gevredigezh-se met a c'hortoze bezañ skoazellet. N'hon eus ket santet an ezhom kennebeut da gentañ, da vezañ digor d'an holl peogwir hor boa disfiz ouzh ar skolidi n'anavezemp ket hag aon hor boa na ve degaset reuz ganto.

"Bremañ e welomp sklaeroc'h. Kreñvoc'h eo ivez kevredigezh K.D. ha poent eo dezhi bezañ digor war ar bed foran, kejañ gant an dud, ha da gentañ gant ar skolidi. D'ar gevredigezh



emsavel, da gevredigezh K.D. eo d'ober ar pont etre ar skolidi hag an Emsav. D'ar gevredigezh eo mont d'ar skolidi, bezañ digor dezho. Ar skolidi o deus ezhomm kejañ gant tud, anavezout tud. Ma ouzomp an dra-se ha ma klaskomp e gwirionez anavezout anezho, ez anavezint ac'hanomp muioc'h ivez hag o devo fiziañs ennomp.

"Penaos anavezout ar skolidi ? Evel just n'eo ket o tarempr-edif anezho evel kelenner hepken. Ouzhpenn deskadurezh ar yezh ez eo mat kinnig dezho emvodoù ma vo tu da gomz, da dabutal, ha kejañ ganto hinienn ha hinienn.

"Tebet omp a-wechoù da grediñ ez eo koll amzer chom da gomz gant unan bennak, da zisplegañ dezhañ meur a wech an hevelep tra. Ret eo henn lavarout adarre : o santout al labour a c'hortoze ac'hanomp, n'hor boa ket ar spered dieub a-walc'h evit gallout selaou mat an dud, klask o c'hompren.

"Fellout a ra deomp ivez mont buan ha buan-tre. Met an dud n'anavezont ket an Emsav o deus un hent hir da ober a-raok e gompren ha dont tre. Lakaet hon eus pell a-wechoù ni ivez. Neuze eo ret lezel an amzer gant ar skolidi da gompren ha da zont.

"Marteze n'hon eus ket graet ar bruderezh gwellañ evit ma ve meizet gant an dud. Komzet hon eus eus ar yezh hepken evel pa vefe ur pal e-lec'h he diskouez evel un darn eus ar pezh a ra Breizh. Ret eo kinnig deskadurezh ar yezh, an emvodoù, an enklaskoù a c'halla bezañ graet, evel un hollenn. Hag evit ma vo komprenet gwelloc'h gant an dud, diazezañ ar bruderezh war un dra hollek-tre : an dud e Breizh a zo Breizhiz." (05 04 68)

EMVR-3

### LENNADENNOU

P.DENEZ, Yezh ar bobl : pinvidigezhioù o vont da goll, Al Liamm  
126/42 1968.

A-zivout "yezh ar bobl" pe, resisoc'h, teodyezhoù henvoazel brezhonek ploue ar C'hornog, e kaver abaoe ur c'hantved daou emzalc'h e-touez ar Vrezhonek desket : un emzalc'h gouiziek, a ra eus an teodyezhoù-se un danvez d'ar studioù a yezhoniezh, hag un emzalc'h mojennek a sell outo evel ouzh ur baradoz kollet o virout Breizh en he glanded. Skouer an emzalc'h gouiziek e voe VALLEE, a ouezas tennañ diouzh an teodyezhoù kement a c'hallas evit pinvidikaat ar yezh lennek (1); skouer an emzalc'h mojennek e voe ar skrivagnerion drefoet-se ankouaet hiziv a rebeche da VALLEE e yezh lennek. An daou emzalc'h a c'hell ivez en em gavout a-gevret, evel ma c'hoarvez e pennad P.DENEZ.

Tu gouiziek ar pennad zo en alioù roet gantañ war an doare da studiañ an teodyezhoù. Afer ar yezhourion eo burutellañ an alioù-se hag o lezel a raimp a-gostez. An tu mojennek avat, gant



al lakadennoù politikel displeget hag empleget en e ser, hon eus da varn.

A dra sur n'eo ket al lakadennoù faos a vank er pennad berr-se. Hag an holl anezho tost da vat zo e dalc'h an hevelep fazi : ober eus ar yezh un domani dioutañ e-unan, un "emframm" (p.45). Deskrivet eo bet ar fazi kevredadoniel-se, anvet ar yezhelour-iezh, ha dizarbennet eo bet gant meur a oberour (2). Aes eo evit gwir da zizarbenn : ur yezh n'eo ket un domani dioutañ e-unan, n'eo ket un emframm; mar'd eus un emframm da lakaat e kaoz, ez eo ar gevredigezh a ra ganti. E tonkad ar gevredigezh enta emañ tonkad ar yezh. Anat eo e nac'h P.DENEZ gwelout kement-se pa gemer da bal e studi gouzout "penaos e stourm ar yezhoù an eil a-enep d'eben, penaos en em intront a-benn en em zistrujañ, hag ar c'hammed kentañ war-du ar bareadenn a zo anavezout doareoù ar c'hleñved" (p.44).

Evit an aozer, n'eo ket ar vro, n'eo ket ar gevredigezh vrezhon an hini a zo da bareañ, met ar yezh; n'emañ ket ar stourm etre an dud, etre ar c'hevredigezhioù, etre an Emsav-dieubiñ hag ar Stad sujer, hogen etre ar gerioù brezhonek hag ar gerioù gallek. Na sot omp oc'h ober politikerezh neuze, o risklañ buhezioù en un emgann arvarus, pa'z eo kreñvaat emframm ar brezhoneg a zo d'ober, ha saveteet e vo pep tra. Ha peogwir emamp gant mojennoù, kontomp mojenn ar pesked ruz : emañ hor pesk ruz, ar brezhoneg, o tifretañ en e vuellestr, ar "bobl". Gwall zantet eo bet gant ur pesk all lammet, an diaoul a oar penaos, en dour lor ma neuñve e peoc'h. Sur mat, e vo kavet warc'hoazh beure war e gein, talpet. Petra ober ? Skarzhañ egile ? N'emaoc'h ket mat. Diskennit afo mikro ho magnetofon dirak beg hor pesk-ni da studiañ e analadenn diwezhañ a-raok ma vo peurgaset gant egile. Ret eo "anavezout doareoù ar c'hleñved" !

Met aozer ar pennad a gomz eus kevredigezh ivez : "Pal ar studi a zle bezañ dastum, ar c'hlokañ hag ar fealañ ma c'heller, ar pezh a zo benveg darempredoù un under kevredigezhel brezhoneger" (p.44). Padal, ret e vo dibab "tud deut un tammig war an oad" (p.45). Perak 'ta ? Peogwir, lakaet er-maez an emsaverion, n'eus mui a vrezhoneg gant ar remziadoù yaouank; peogwir e chom seul vrezhonekoc'h an darempredoù ma vezont renet pelloc'h diouzh kreiz ar froud kevredigezhel; peogwir, lakaet er-maez kevredigezh arnevez an Emsav, n'en deus ar brezhoneg perzh ebet ken en obererezh keodedel. Zoken el lec'hioù ma vez komzet ar muiañ an teodyezhoù henvoazel, n'eo ar brezhoneg nemet ur benveg-daremprediñ a eil renk, un aspadenn hejet evel ur c'hroc'hen kozh diwar groc'hen nevez ar gevredigezh, a zo gallek, gwiadet ma'z eo diwar ar framm stadel gall. Touellerezh n'eo ken neuze komz eus "benveg darempredoù un under kevredigezhel brezhoneger".

Moarvat ez eo ul labour gouiziel studiañ an teodyezhoù; ha reizh eo hetañ ma ve krouet e par Trede Derez Skourr an Deskad-

urezh Vroadel ur greizenn imbourc'h o plediñ ganto, - gant ma c'hallfed dioueriñ labour ha kevalaoù d'an dachenn-se hep dibourvezañ tachennoù pouezusoc'h.

Petra a studife ar greizenn imbourc'h-se ? An teodyezhoù henvoazel ? Ya marteze, rak, evel ma lavar P.DENEZ, difraeañ zo d'ober mar fell deomp tapout un dra bennak anezho c'hoazh kent ma steuziint. Hep mar e chom enno troiennoù, arverioù, termenoù a c'hallo bezañ degaset d'ar gevredigezh arnevez, pe fiziet er Greizenn Imbourc'h Sturvezhouriezh, evit ma tennint o mad dicuto. Met na skuilhomp ket daeroù war ar pezh na vo ket dastumet, pe neuze kemeromp hon lañs evit दौरañ bered an teodyezhoù krenn- ha henvrezhonek, keltiek hag indezeuropek. Pep kevredigezh a grou he yezh diwar an dafar aet ganti e dilerc'h he diaraogerezed, hag hec'h obererezh-krouiñ eo a zo he sevenadur (3). Ma n'eo gouest nemet d'en em silañ e dibourc'h he diaraogerez, gwelloc'h neuze bezañ e tu ar gevredigezh a roy dezhi taol ar marv.

Mar'd eus avat un deodyezh da studiañ, ez eo hini ar gevredigezh arnevez a zo o kreskiñ war ziazezoù an Emsav; mar'd eus ur stourm, hag ur stourm trec'h, da studiañ, ez eo an hini a ro d'ar brezhoneg e lec'h er vro evel yezh a sevenadur, - n'eo ket ur stourm a yezhoù ez eo, met ur stourm a gevredigezhioù hag a Stadoù. Mar'd eus un unvez kevredigezhel brezhoneger da anaout ez eo an Emsav o tiazazañ ar Stad Vrezhon, amplegad kentañ ur gevredigezh vrezhoneger.

Mat eo studiañ an teodyezhoù henvoazel, aspadennoù toc'hor kantvedoù ar faezhidigezh, - forzh penaos, ar studi-se ne oufe implijout ouzhpenn un nebeut arbennigourion; hogen arabat ankouaat ez eo bepred trec'h politikel ur gevredigezh a ro an trec'h d'he yezh. Ar yezh da studiañ ha da berc'hennañ zo yezh an trec'h, hini an Emsav.

(1) Sl. Frañsez VALLEE, Emsav 3/58, ha dreist-holl /61 VALLEE unvanour. Al lenner a denno e vad ivez eus ar pennadoù-mañ: Lec'h ar yezh en Emsav hag er vro, Emsav 3/51; Hag-eñ ez eus ur gudenn eus an teodyezhoù e Breizh ?, Emsav 4/82; Pelec'h gwriziennañ ? 6/129; Lec'h Gwalarn en Emsav 6/137; An Emsav evel kevredigezh 8/206; Kuzul ar Brezhoneg hag an Emsav, ha dreist-holl I. Ar studioù 12/329.

(2) Sl. Youenn OLIER, Opiom an Emsav, Preder 24-25/55 1961.

(3) Sl. Hag-eñ ez eus ur sevenadur brezhon ?, Emsav 2/5; Pelec'h gwriziennañ ?, Emsav 6/129. Youenn OLIER, Ar brezhoneg er c'hêrioù, Al Liamm 124/418.



DARVOUDOUCABRO

Dibaot an deizioù ma n'eus meneg ebet eus CABRO war gazet-  
 ennoù gall Kornog ar vro. CABRO zo teskanv ur "Comité d'Action  
 de la Bretagne Occidentale". Fellout a ra dezhañ bodañ kement  
 nerzh armerzhel, micherel, keodedel a zo en departamant 29  
 a-benn luskañ diorreadur an departamant-se.

Arbenn krouidigezh CABRO a voe e daou stadadur :

1. Emañ 29 o sankañ en isdiorreadur : ur gennad kentael o tav-  
 antekaat, ur gennad eilvedel dister hag o koazhañ c'hoazh (70  
 bouedvirerezh aet da get dindan 15 vloaz), ur gennad tredeel  
 gwan. An isgourc'hwel o tevoudañ un divroerezh diastal (etre  
 3 ha 4 000 bep bloaz), ha da heul, ur feur-kreskiñ izeloc'h  
 eget keitad Frañs (1), ur boblañs o koshaat. Ur c'horvoder  
 keitad etre 20 ha 40 % izeloc'h eget korvoder keitad Frañs.  
 Un aveadur kehentel skort ha diazas...

2. Ur c'hwitadenn eo bet an digreizennañ embreget gant gouarn-  
 amant Paris : krouidigezh ar penngêrioù-kempouez, Naoned ha  
 Roazhon, n'he deus degaset gwered-diorren ebet; ur skramm eo  
 bet an div benngêr-se evit parzh kornok ar vro (etre 54 ha 66  
 e voe krouet 19 000 gourc'hwel en R.S.B., anezho etre 2 ha  
 3 000 er Finistère, 17 e Douarnenez. Aner eo bet leviadur ar  
 "poultrennerezh kredoù" : aet eo ar bouldrenn d'en em goll e  
 traezhoù an dezerzh armerzhel.

Amkanioù CABRO.

Kentoc'h eget sevel ur roll hir a amkanioù munut, en deus  
 CABRO kemeret daou amkan pouezus : greantelaat, kehentekaat 29.

1. Touell eo gortoz al lusk-diorren eus an diavaez : "Aner eo  
 diazezañ leviadur emastenn Breizh war zigreizennañ Paris". Ar  
 blein-diorren (2) zo da grouiñ en departamant e-unan. Setu perak  
 ez eo bet dibabet da gentañ pazenn ar greantelaat krouiñ ur  
 porzh-tireoul e Brest. Anv ez eus ivez, douetus a-walc'h, gant  
 Paris da ziazezañ ur porzh-tireoul e Brest; ne ve avat nemet  
 ur porzh-gaol, eleze ur porzh evit degemer an tireoul hag e  
 askas diouzhtu war-du greantvaoù pell. Ar porzh goulennet gant  
 CABRO zo ur porzh-blein, an tireoul o chom er vro hag o reiñ  
 tro d'un ijinerezh pounner ha d'ur steudad a ijinerezhioù-  
 pleuskañ (mezelloù, saverezhioù treloc'hel, elektronik) hag a  
 ijinerezhioù bouedel.

2. Bac'het emañ Breizh e penn pellañ ar c'hwec'hkorn, gronnet  
 gant ur mor nad eo ket evit tennañ he mad dioutañ. Padal, an  
 darempredoù dre vor a ve ar re bouezusañ evit Breizh. Alese  
 eil amkan CABRO : disvac'hañ Breizh, pe gentoc'h 29. A-du-rall,  
 an disvac'hadur zo da gas ivez war an tir, dre aveiñ an tri  
 ahel bras, en norz : Brest, Dinan, Caen, Seine Izel, Norz Europa;  
 e-kreiz : Kastellin, Roazhon, Paris, broioù ar Rhein; er su :



Kemper, an Oriant, Naoned, Su Europa.

Perak eo bet dibabet Brest da zanvez blein-diorren ? En arbenn eus he savlec'h : o vezañ m'emañ e penn kornokañ ar vro e roy an tu da eilpennañ ar froud; en arbenn eus he morlenn a ra anezhi unan eus kentañ porzhioù ar bed; en arbenn eus he foblañs hag en diwezh eus he Skol-Veur.

Diouzh savboent ar gounezerezh, setu ar poellata arveret gant CABRO evit difenn e vennad greantelaat : diazezet emañ hon armerzh war ar gounezerezh; 80 % eus kenderc'h kriz an departamant zo a orin loenel (moc'h ha laezh). En enep d'ar pezh a glever alies, ment hor mereurioù n'eo ket re vihan (en Izelvroioù ez int bihannoc'h c'hoazh), met ne vezont ket askorus ken dre ma n'emañ ket en o c'hichen an ijinerezhioù a rofe dezho an tu a) da embreger meur a c'hounezadur b) da vezañ disammet diouzh ar mizoù-dezougen uhel a vrev ar gounezerezh brezhon. Dre-se e c'haller diogeliñ : silvidigezh ebet evit hor gounezerezh hep ar greantelaat.

#### Kaderezh CABRO.

Daou boent zo ivez e tres oberiezh CABRO : bodañ holl nerzhioù an departamant, ober anezho ul luskad-gwaskañ ouzh gouarnamant Paris.

1. Klask a ra CABRO unaniñ en e greiz ar c'hweluniadoù, ar c'hambroù-armerzh, ar c'huzulioù-kêr, an dilennidi. Petra ez eo deuet da vodañ betek-henn ? Ar c'hweluniadoù gounideion, dornwezhourion, kenwerzhourion; ar c'hambroù-armerzh. Brasniver ar c'huzulioù-kêr n'o deus ket emezelet, hogen ar 100 o deus respontet a ziskouez emaint a-du gant an amkanioù dibabet.

Disoc'h ebet evit c'hoazh e tu ar c'hweluniadoù micherour ha re an deskadurezh. O arguzenn eo hini an engouestladur politikel : int a zo politikaet, CABRO a nac'h politikaet ar gudenn.

War a hañval ez eo bet CABRO betek bremañ ur bodad-kelaouiñ. Mont a ra e izili a gêr da gêr, o tisplegañ d'ar boblañs, d'ar c'hweluniadoù, d'ar guzulierion-gêr, ar saviad freuzek m'emañ armerzh o departamant. Eus an droienn-vrudañ-se e reont un embregadenn evit "krouiñ ur spered departamantel".

2. Ur wech dastumet ali tud an departamant hag an aozadurioù armerzhel m'emaint bodet, emañ CABRO e soñj en em dreiñ ouzh gouarnamant Paris a-benn diframmañ dioutañ ar c'hredoù a zo ezhomm evit erounit an daou amkan mennet gantañ. "Ar gouarnamant zo an arc'hant gantañ, setu perak ez eomp dezhañ". Termenoù en deus lakaet endeo d'ar gouarnamant : 15 meurzh, 15 ebrel. War a hañval, Paris n'he deus ket graet stad vras eus arc'hadennoù an departamant 29 betek-henn.

#### Dezrann oberiezh CABRO.

Brasañ rebech a vez graet da gCABRO eo e vevnadar departamantel. Klevout a reer tud ha n'o deus koulz lavaret darempred ebet gant an Emsav oc'h abegiñ en termenoù-mañ : "Breizh a-bezh

zo e ken gwall saviad ha Finistère; Breizh eo an hollenn; Finistère n'eo ket un hollenn".

Evel just ez eo lu ober meneg a "spered departamantel". Met peogwir ez eneber an "hollenn Breizh" ouzh ur parzh anezhi ez eur aotreet da c'houlenn petore devoud ez eo ar Vreizh-se e spered an abegerion. Bep ma tremen ar bloavezhioù e koazh talvoud buhezel ar pellderioù war diriegezh un hevelep riez : darvoud bihan eo d'un Amerikan mont 1 000 km pelloc'h da gemer ur gourc'hwel nevez. Adalek ar mare ma weler Frañsizion e pep lec'h, mont hiziv da labourat da Vrest evit ur micherour eus Pont'n-Abad a vo warc'hoazh kevatal da gemer gourc'hwel e Le Havre pe vBillancourt. Ken brizhtrivliadel eo difenn ar gwir o defe Frañsizion Vreizh da chom war zouar o rannvro ha difenn, evel ma ra CABRO, ar gwir o deus Frañsizion 29 da chom war zouar o departamant. Divroañ zo kuitaat e vro evit ur vro all, da lavarout eo mont er-maez eus kelc'h ur sevenadur evit en em gavout e kelc'h ur sevenadur all. Divroañ a reomp pa guitaomp Breizh evit tremen e Bro-C'hall, dre an arbenn eeun ma n'omp ket Frañsizion. Ha n'omp ket Frañsizion peogwir e vount ennomp an nerzh ramzel o tont eus pellderioù an Istor hon lusk da grouiñ ur sevenadur, ken hollvedel ha forzh pe sevenadur bras a zo pe a zo bet. A dra sur, un "hollenn Breizh" a zo, hag un devoud politikel ez eo, an danvez riez krog da gemer neuz e speredoù tud ar vro-mañ.

An eil rebech graet da gCABRO eo e zibolitikelezh. Ar frazennoù-mañ a glever digant e izili : "Ar c'hweluniadoù micherour o deus goulennet diganimp embann mennadoù a-zivout aoz ar gevredigezh. N'eo ket hor roll". "Klask kemmñ ar framm politikel gall a vefe koll amzer, dek vloaz da nebeutañ". "Rebechet eo bet deomp tremen hep plediñ gant ar c'hudennoù politikel, chom da skouer hep goulenn ur parlamant e Roazhon, ur vodadenn vrezhon. Bezomp sirius. Ur vodadenn e Roazhon zo ur pal. Met, keit ha ma n'hor bo ket disvac'het ar vro ne vo ket tu da dizhout ar pal-se. Amkan CABRO zo mont er-maez eus an isdiorreadur". Diaes eo evel just degemer seurt arguzennoù, pa ouzer e rank an disvac'hadur politikel bezañ sevenet evit ma teraoufe an disvac'hadur armerzhel (3) : ar bobl isdiorreet a rank da gentañ dieubiñ he bro eus ar galloud estren, ken politikel, ken armerzhel, ha neuze stagañ gant he holl nerzh da grapat gant hent serzh ha hir an diorreadur.

Amkaniou armerzhel CABRO n'o deus o chañs da vezañ diraezet nemet gant rezid politikel Breizh. Er-maez eus ur Stad Vrezhon e chomint e par an hunvreoù.

EMVR-5

(1) Sl. Stad ar boblañs e Breizh, Emsav 10/258.

(2) Sl. An isdiorreadur, Emsav 6/150.

(3) Sl. id., ha /156 An diskoulmoù d'an isdiorreadur.



NOTENNOU      AR MERZHEL      ( 14 )

AR C'HRED

Termenadur ha modelezhioù.

En Notennoù a-raok (Emsav 15/92), hon eus gwelet petra eo ar c'hred. Ar skouerioù eeunañ eo an arc'hant prestet, pe ar marc'had-ourezhioù gwerzhet war dermen. Modelezhioù e-leizh avat a ziforc'her hervez degemerour ar c'hred, ar gwarantoù roet gantañ d'ar prester, ha dreist-holl hervez padelezh ar prest.

Kred d'ar bevezer, kred d'ar c'henderc'her. Kred d'ar bevezer (lavarout a reer ivez : d'ar beveziñ, d'ar bevezerezh) ez eus pa brener ur c'harr war astermen, pa zegemerer ur prest da sevel un ti-annez. Bez' ez eus prest d'ar c'henderc'her (d'ar c'henderc'hañ, d'ar c'henderc'herezh), pa dalvez an arc'hant prestet da brenañ kevalaoù d'un embregerezh.

An arc'hant da brenañ kevala a reer ivez kellid anezhañ pa dalvez da ziazezañ pe da greskiñ an embregerēzhioù, da lavarout eo da brenañ kevalaoù sonn, eleze d'ober postadurioù. Postañ arc'hant en un embregerēzh a lavarer c'hoazh kellidañ un embregerezh. Gwelout pelloc'h an displegadurioù a-zivout ar c'hred war hir dermen hag ar bankoù-kellidañ.

Hervez skourr ar c'henderc'hañ e komzer eus kred greantel, kred kenwerzhel, kred gounezel, kred merdeel.

Kred goudoret, kred dic'houzor. Alies e vez goulennet gwarantoù digant an amprester. Mar ro unan eus e vadoù da ouestl d'e gredour, e lavarer ez eo goudoret ar c'hred; komz a reer ivez eus kred ouzh tra, pe c'hoazh eus kred trael. Hervez natur ar mad roet da ouestl, e reer anv eus kred ouzh heloc'h (pe kred heloc'hel) pa vez gouestlet ur mad heloc'h (adalek ar pezh arrebeuri betek ar gevran c'hreantel).



eus kred\_ouzh\_diloc'h (pe kred\_diloc'hel) pa vez gouestlet ur mañ diloc'h (douar, ti).

Gouestlañ ur mañ diloc'h a vez lavaret arouestlañ ar mañ-se. An arouestl a reer eus ar gwir roet gant an dleour d'ar c'hredour war ur mañ diloc'h. Dre-se ez anver kred\_arouestlel, kred\_ouzh\_rouestl ar c'hred diloc'hel.

Dic'houdor eo ar c'hred pa ne vez gwarantet gant mañ ebet, met hepken gant ger an dleour, - setu perak e komzer eus kred\_ouzh\_ger (pe kred\_gerel). Lavarout a reer ivez kred denel, kred personel.

Tud all a c'hell kevrediñ ouzh an dleour ha bezañ kengret gantañ evit e zle : e zizleañ a raint mar bez fellat. Mont\_da\_warant a reont, gwarantet int evit an dleour.

Kred\_war\_hir, krenn\_pe\_verr\_dermen. Ur vodelzh pouezus eus ar c'hredoù eo o fadelezh; hervez o fadelezh e tiforc'her :

- ar c'hred\_war\_verr\_dermen, a dalvez da bourchas kevala red, da lavarout eo an arc'hant ret d'an embregerion evit talañ ar goprou, prenañ marc'hadourezhioù, h.a.. Aotreet e vez gant bankoù-fiziañ ha -diskontañ evit 3, 6 pe 12 miz;

- ar c'hred\_war\_grenn\_dermen, krouet goude ar brezel bed kentañ evit skoazellañ an embregerezhioù greantel drastet da adsevel ha da neveziañ o aveadur. Etre 2 ha 5 bloaz darevezh zo dezhañ;

Pa zegouezh un dle gant e dermen, eleze pa rank an arc'hant prestet bezañ daskoret, e lavarer ez eo darev. Darevezh un dle, ur c'hred, un teul-kred zo enta o fadelezh, eleze ar pad etre an deiz ma vezont tennet ha deiziad o zermen. Deiziad an termen a anver c'hoazh : termen\_darevezh, dibenn\_darevezh, deiziad\_an\_darevezh. Un dle, un teul o tostaat d'e dermen a lavarer diwar e benn emañ o tareviñ, pe war\_zareviñ.

- ar c'hred\_war\_hir\_dermen a dalvez da bourchas kevalaoù sonn evit krouiñ pe greskiñ an embregerezhioù. Aotreet e vez gant bankoù arbennik (bankoù-kellidañ). Pe neuze an ampresterion a werzh war-eeun d'ar c'hevredig (1) teulioù-kred anvet endalc'henoù (2).

Kred\_prevez ha kred\_foran. Pa vez an amprester un dulelezh prev-  
ez (hinienn, kevredad) e komzer eus kred prevez; pa vez anezhañ un

dudelezh foran (ur gumun, ur riez) e komzer eus kred foran.

Komz eus kredadusted un danvez amprester zo merkañ ar fiziañs, ar c'hred a c'haller lakaat ennañ. War an dachenn avat, ne dalvez ar c'heal-se nemet evit an ampresterion brevez. En Istor e weler e tremenas meur a riez hep en em zizleañ.

### An hanterourion arc'hantel ha nevid ar c'hredoù.

Gwelet hon eus (Emsav 15/85) ez eo ar moneiz an hanterer en amred ar madoù. Gant an armerzh arnevez avat ne gemerer ket ken savboent an eskemmañ, met savboent ar c'henderc'hañ. An amred n'emañ ket ken etre perc'henned vadoù, met etre kevala ha kenderc'h, etre perc'henned arc'hant ha kenderc'herion. Etre an arc'hanterion, a zegas kevala, hag ar genderc'herion, a lak ar c'hevala-se da dalvout, ez eus hanterourion.

E-ser an hanterourion-se emañ nevid ar c'hredoù. An hanterour klasel eo ar bank; hanterourion amvankel zo a-hend-all : ar c'hefioù espern, ar c'hevredadoù kretadur, h.a.

### An teulioù-kred ha nevid an arc'hant

Da anaout e zle e ro an dleour d'ar c'hredour un teul skrivet ma ouestl warnañ talañ e zle d'an termen. An teul-se, anvet teul-kred, a c'hell bezañ gwerzhet gant ar c'hredour; ar prener a zeu da vezañ ar c'hredour nevez. En doare-se e c'hell ur prester adpiauañ e arc'hant hep e lemel digant an amprester.

Un nevid pouezus zo en em ziorreet en armerzh arnevez en-dro da genwerzh an teulioù-kred.

Prenañ ha gwerzhañ un teul-kred a vez lavaret nevidañ anezhañ. E-se e roer d'an teulioù-kred an anv : teulioù nevidadus. Aes eo kompren e vez marc'hatmatoc'h un teul-kred gwerzhet kent termen eget d'e dermen, pezh a zispleger pa lavarar ez eo bihanoc'h e werzh nevidat eget e werzh verkel. An diforc'h, jedet evel ur c'hampi, a anver diskont.

Hervez padelezh ar prest e ranner nevid an arc'hant etre nevid ar c'hevalaoù o sellout ouzh ar c'hredoù war hir dermen, ha nevid ar

moneiz o sellout ouzh ar c'hredoù war verr dermen.

Nevid ar c'hevalaoù a anver c'hoazh nevid ar c'hellidoù, pe nevid yalc'hel. Arbenn an anv-mañ diwezhañ eo e vez anvet Yalc'h an ensavadur pennañ a bled gant nevid ar c'hevalaoù (lavarout a reer ivez Yalc'h an talvoudennoù); brasañ kreizennoù yalc'hel, pe yalc'hseziou, ar bed zo e New-York (Wall Street) hag e London. Er Yalc'h e teu an degaserion gevalaoù da brenañ leveennoù-Stad hag endalc'henoù embannet gant ur riez, ur rannvro, ur gumun pe kevredadoù greantel, kenwerzhel pe gellidel. Pa fell dezho adpiaoañ o c'hevalaoù e werzhont an teulioù-kred-se en hevelep nevidva, gant buzad pe goll, hervez m'o deus ar feurioù gorreet pe c'houzizet etre deiz ar prenañ ha deiz an adwerzhañ.

Nevid ar moneiz zo anezhañ ar goulennnoù hag ar c'hinnigoù prestoù war verr dermen; nevidvaoù ar moneiz zo ar bankoù-fiziañ ha -diskontañ. Er reizhiad-mañ e renker ivez ar bankoù-monañ (Emsav 15/91).

War goazhañ ez a an enebadur etre an daou nevid kevalael ha moneizel, o vezañ ma'z a war steuziañ an diforc'h etre kevalaoù sonn (douar, adeiladoù, aveadurioù) ha kevalaoù red (marc'had-ourezhioù, h.a.). Ent-klasel, e talvez e ar prestoù hirdermen, - e stumm endalc'henoù ardaladus dindan 30 vloaz, - da gellidañ an elfennoù diloc'h-rik, hag ar prestoù berrdermen, war 3 miz, da harpañ arc'hwel an embregerezhioù. Bremañ avat ez arverer kredoù etre 2 ha 5 bloaz darevezh, - kredoù krenndermen a reer anezho. Tuet eur da ober, evit renkañ ar c'hredoù, gant an derezioù liñvelezh, hag e komzer eus arboell liñvel, damliñvel, amliñvel, klaviet, h.a. (Emsav 15/86).

An teulioù-kred berrdermen.

#### Al lizher-talañ

Al lizher-talañ, anvet c'hoazh lizher-tennañ, tennadenn, zo un teul skrivet ma ro drezañ ur c'hredour d'e zleour an urzh da dalañ ur sav arc'hant d'un deiziad merket en anv pe e gourc'hemenn un trede den. Lakaomp en deus ERWAN, kenwerzhour en Alrae, gwerzhet



marc'hadourezhioù da RONAN, kenwerzhour e Roazhon, evit 1 000 lur. Fellout a ra dezhañ ma ve talet an arc'hant-se da ROPARZH a zo o chom e Gwened. Sevel a ray un dennadenn en termenou-mañ : "Alrae, d'ar 1<sup>añ</sup> mae 1972. D'ar 1<sup>añ</sup> eost 1972 e talot 1 000 lur ouzh al lizher-mañ en anv (pe : e gourc'hemenn) ROPARZH. Sinet : ERWAN". Dindan, e lakay : "Da RONAN, kenwerzhour, e Roazhon" hag e kaso al lizher-talañ da ROPARZH.

Krouer an dennadenn, ERWAN er skouer hon eus kemeret, a anver an tenner; RONAN, a zle talañ an dennadenn (ha na zeu da vezañ dleour anezhi nemet goude bezañ he darbennet), zo an tennadour; ha ROPARZH, a zegemero an arc'hant, zo an degemerour, pe an taladour anezhi.

ROPARZH, an taladour, a c'hell mirout al lizher-talañ en e zoug-paperioù betek an termen darevezh anezhañ, eleze betek ar 1<sup>añ</sup> eost, hag e zaveiñ neuze dirak RONAN a dalo dezhañ ar 1 000 lur. Hogen, dre berzh an diviz e-gourc'hemenn, e c'hell ROPARZH treuzdouden e gredouriezh dre hec'h ardestañ en anv (pe c'hoazh : e gourc'hemenn) VEFA. Ardestadus eo ivez enta al lizher-talañ, hag ar perzh-se zo un doare da gaout gwarantizoù ouzhpenn, rak an ardesterion a vez kengret gant an tennadour.

#### Roll armerzhel al lizher-talañ.

- Ur benveg-talañ eo, ur moneiz leek. Oc'h adkemer ar skouer diagent, lakaomp en deus ROPARZH 1 000 lur a-hend-all da zaskoriñ d'e vank a-benn ar 1<sup>añ</sup> eost. Un nebeut devezhioù a-raok an termen-se e kaso d'e vanker al lizher-talañ a zo gantañ en e zoug-paperioù. Ar banker en lakay daveiñ dirak an dleour, RONAN, a'n em zizleo, o tizleañ war un dro ROPARZH.

- Ur benveg-kred berrdermen e c'hell bezañ. Un doare eo pergen evit ar c'hreantourion da bourchas kevalaoù red. Lakaomp, o tennañ hor mad eus an hevelep skouer bepred, en deus ROPARZH ezhomm eus e arc'hant a-benn ar 1<sup>añ</sup> mezheven. Reiñ a ra al lizher-talañ d'e vanker, a dal dezhañ diouzhtu en eskemm ar werzh nevidat anezhañ, eleze ar sav merkel maes un diskont jedet kevreizh d'an taluad etre deiz an

taladur ha termen an darevezh. Un teul nevidadus eo enta al lizher-talañ.

- Ur benveg dezougen kevalaoù e c'hell bezañ etre un nevidva hag unan all, e diabarzh ur riez pe eus ur riez d'unan all, o reiñ tu da zilec'hiañ arc'hant hep dilec'hiañ moneiz.

#### Al lizher-anzav

Al lizher-anzav, anvet c'hoazh anzavenn, merk, zo eeunoc'h eget al lizher-talañ. Daou anv hepken zo warnañ er mare m'en krouer : hini an dleour, o c'hrataat talañ an arc'hant merket d'un termen divizet, hini ar c'hredour a vo talet dezhañ an arc'hant. Amredek e c'hell ivez ober an anzavenn diwar-bouez ardestadurioù lerc'h-ouzh-lerc'h. En doare-mañ e vez savet : "D'ar c'hentañ a viz Ebrel 1973 e talin mil lur da vMADALEN. Kemper d'ar 1<sup>añ</sup> ebrel 1972. Sinet : YOUENN".

#### Ar bankoù.

En Henamzer e oa ar vankerion trafikerion vetaloù prizius, eskemmerion voneiz, dezougerion gevalaoù, kefierion e gwazerezh o arvalion. Pourchas kredoù a raent ivez, nemet e chome ar gefridi-se unan a eil pouez. Gant ar Reverzhi C'hreantel avat ez eo bet diorreet a-vras ar gredouriezh, hag ez eo deuet ar banker da vezañ a-raok pep tra ur marc'hadour kredoù, oc'h amprestañ arc'hant diouzh un tu evit e brestañ diouzh un tu all.

Evel m'hon eus gwelet uheloc'h ez eus daou seurt bankoù : ar bankoù-monañ, a zo o c'hefridi lakaat moneiz en amred, ar bankoù-kred, a zo o roll hanterouriñ etre perc'henned an arc'hant hag ar genderc'h-erion, - hag, e degouezhioù'zo ar vevezerion.

Studiet hon eus ar bankoù-monañ en Notennoù a-raok (Emsav 15/91 hh.). Daou rumm a reer eus ar bankoù-kred : ar bankoù-fiziañ ha -diskontañ, ar bankoù-kellidañ.

#### Ar bankoù-fiziañ ha -diskontañ

Ar bankoù-fiziañ ha -diskontañ a zegemer digant ar c'hevredig lakadoù a rankont bezañ gouest da zaskoriñ war c'houlenn eeun ar fizierion; setu perak e reer eus ar presteoù-se lakadoù helam, fiziadoù dastaladus war c'houlenn pe ouzh gwel pe, ent-verr, fiziadoù war c'houlenn, fiziadoù ouzh gwel. Izel e vez ar c'hampi. Benvegou an amred zo ar chekennoù hag an urzhioù-treuzdougen (Emsav 15/94-95). Lakaet e vez ul lod eus ar fiziadoù da arc'hantañ ar greadoù diskontañ, dre hanterezh kouraterion.

#### Pennaenn-diazez ar bankerezh.

Dleour eo ar bankoù-fiziañ ha -diskontañ a yalc'hadoù arc'hant bras, luniet en o mentelioù gant ar fiziadoù ouzh gwel ha menteladoù kred ar c'hontoù red. Lamadus d'ar c'hentañ goulenn ez eo dre reolenn ar fiziadoù-se. N'eo ket a-walc'h enta d'ar bankoù-se bezañ talus, eleze kaout fredoù bras e stumm madoù diloc'h ha kevalaoù klaviet. Dav eo dezho kaout en o c'herz e pep mare arc'hant liñvel, liñveladoù, a-walc'h evit gallout dastalañ o fiziadoù d'ar gredourion a zeu d'o lemel. Dre-se ez eo pennaenn-diazez ar bankerezh houmañ : par e tle bezañ bepred al liñveladoù d'al lamadusterioù.

Er pleustr e vez kuñvaet ar bennaenn-se : ar bank a zalc'h en e gerz peadra da dalañ ar goulennoù arc'hant a zegouezho gantañ bemdez ent-wirheñvel; a-du-rall, ouzhpenn war e liñveladoù (eleze ar moneiz paper a zo en e gef) e c'hell kontañ diouzh ret war zamliñveladoù : lakadoù helam bet fiziet gantañ e bankoù all pe e Teñzorva ar riez, an arc'hant dleet dezhañ war verr dermen; eus al liñveladoù hag an damliñveladoù-se e reer fred liñveladus ar bank (Emsav 15/86).

Ur ger lavarimp eus an elfennoù pennañ a ya d'ober ar fred liñveladus diouzh un tu, an diwan lamadus diouzh an tu all.

#### Elfennoù ar fred liñveladus.

- An diskontañ hon eus gwelet c'hoazh. Diskontañ un teul-kred kent e zarevezh zo astenn d'an dalc'her ur yalc'had arc'hant par da sav merkel an teul war-bouez ul lamadenn anvet diskont. Al lamadenn-se zo anezhi sammad a) ar c'hampi jedet diwar ur feur



savelek (anvet feur an diskontañ), a zo an diskont ent-strizh b) kevuziadoù kemeret gant ar bank evit e gefridi hanterour, a reer dellezadoù : dellezad-kouratañ, dellezad-enkefiañ, anezho.

- An aotren kred zo anezhañ ur c'hendiviz ma ouestl drezañ ur banker astenn arc'hant d'un den pe d'ur c'hevredad (anvet ar c'hredadour) a-benn diraez un usvevenn hag evit ur badelezh termenet. Ar c'hred aotreet a c'hell bezañ ouzh ger pe ouzh tra, heloc'hel pe ziloc'hel. Lakaet e vez e piaou ar c'hredadour e stumm moneiz, ar c'hredadour o tennañ ur chekenn war ar bank (kred dre gef), pe er stumm-mañ : darbenn a ra ar banker ul lizher-talañ tennet warnañ gant ar c'hredadour (kred dre zarbenn).

- An astenn ouzh gwarant zo anezhañ ar prestañ en eskemm eus ur gwarant heloc'hel (teul-kred, marc'hadourezhioù).

#### Elfennoù an diwan lamadus.

An diwan lamadus a c'hoarvez eus menteladoù kred ar c'hontoù red.

Evel hon eus gwelet uheloc'h (Emsav 15/93-94) ez eo ar mentelad kred par d'an diforc'h etre sammad al lakadoù ha sammad al lamadoù. Al lakadoù zo meur a seurt anezho :

- ar fiziadoù ouzh gwel, pe fiziadoù lamadus ouzh gwel;  
 - ar fiziadoù gant rakkemenn : endalc'het eo ar fizier da gas kemenn d'ar bank un nebeut devezhioù a-raok lemel arc'hant diwar e gont;

- ar fiziadoù trazennadus, anezho al lakadoù war ar c'hontoù-red kenwerzhel; piaouer ar gont a c'hell tennañ muioc'h eget n'eus a arc'hant en e ventelad kred.

#### Ar bankoù-kellidañ

O c'hefridi zo pourchas kevalaoù a-benn diazezañ embregerezhioù nevez, brasaat hag arnevesaat ar re gozh. War hir dermen e vez graet o frestoù : postadurioù int.

Ur c'hevala kevredadel, ha miradoù, ha n'eo ket fiziadoù a-berzh arvalion pe lakadoù a-berzh bankoù all, a dalvez dezho da ren o

greadoù. En o mentel, ezeo al lec'h dalc'het gant ar fred klaviet e stumm teulioù-strobad (3) kalz brasoc'h eget e mentel ar bankoù-fiziañ.

Daou seurt greadoù a ren ur bank-kellidañ :

- Kemer perzh e krouidigezh un embregerezh e stumm ur c'hevredad dre gevrannoù. E-unan-penn pe a-gevret gant bankoù all e sav ar bank ar c'hevredad, an diazezerion anezhañ o prenañ an hollelezh pe ar brasniver eus ar c'hevrannoù e moneiz. Ouzhpenn-se, en askont eus o degasadennoù e traezoù hag eus ar gwazadoù sevenet evit luskañ an embregerezh, e kemeront evito kevrannoù diazezerion a ro dezho gwirioù war ar buzadoù da zont (4).

- Emellout en astennidigezh un embregerezh. Ar bank a bren neuze un niver kevrannoù bras a-walc'h evit kaout al levezon er bodadegoù kevranneion hag evit reoliñ ar c'hevredad; pe neuze, e laka ar c'hevredad da greskiñ e gevala dre embann kevrannoù nevez evel en degouezh kentañ.

#### An aozadurioù-kred arbennik

Ar bankoù-fiziañ hag ar bankoù-kellidañ n'int ket evit bastañ d'an holl ezhommoù kredoù a zo. Setu perak ez eus aozadurioù a zo o c'hefridi kinnig prestoù e degouezhioù termenet, da rummoù amprest-erion dibarek pe evit arverioù arbennik.

An aozadurioù-kred war verr pe grenn dermen a zo anezho :

- ar c'hred kevelourel a brest arc'hant d'an dornwezhourion, d'ar genwerzhourion hag ar c'hreantourion vihan;

- ar c'hred gounezel a bourchas kredoù d'ar blouezidi dre gevredadoù kevelourel ha kefioù kred kilezel (5);

- ar c'hred ouzh heloc'h, pe kred heloc'hel, a brest arc'hant o c'houlenn gouestloù : talvoudennoù, bravigoù ha traezoù prizius, marc'hadourezhioù.

An ensavadurioù-kred war hir dermen a zo anezho :

- ar c'hred ouzh diloc'h, pe kred diloc'hel, anvet c'hoazh kred ouzh arouestl, kred arouestlel, a c'hell bezañ pourchaset gant prev-ezidi dre hanterouriezh an noterion; en holl vroioù avat ez eus bet krouet ensavadurioù dezvel ganto roll bankoù arouestlel, da skouer Crédit Foncier e Frañs, o prestañ arc'hant evit ar sevel tiez.

Menegiñ ne raimp ken an ensavadurioù a zo o c'hefridi dastum kellidoù hag a vez reolet gant ar Stad. E Frañs da skouer emañ : Kef-fiziañ ha tredeogañ o verañ ar fiziadoù a-berzh lezenn, an arboelloù fiziet er c'hefioù-espenn, er C'hedskor, h.a.; ar C'hefioù-espenn; Gwazerezh ar chekennoù-post, h.a.

Menegiñ ne raimp ken Teñzorva ar riezoù, a zo al lodenn eus amaezhiadur ar c'helliderezh-Stad a bled gant merañ glad ar riez, - bank-fiziañ ha -kellidañ ar riez ez eo en un doare. En e benn emañ maodiern an arc'hant. E "arvalion" zo an embregerezhioù brodelet hag ar brevezidi a laka ennañ o arc'hant, o prenañ da skouer Madennoù an Teñzor. Skourroù an Teñzorva eo mererezhioù an holl skourroù eus an amaezhiadur-Stad : telloù, postoù, h.a.

- 
- (1) Kevredig g., tud ar gevredigezh en o darempredoù foran.
  - (2) Endalc'henn b., teul-kred roet da siner un amprest embannet gant ur c'hevredad; perc'henned an endalc'hennoù, pe endalc'henneion, a zegemer kampi an arc'hant prestet hag an arc'hant-se e-unan e-ser un ardaladur steuñvet; sl. Kevrann en Emsav 9/249
  - (3) Strobad teulioù g. ls., dastumad teulioù-kred, talvoudennoù e kerz un hinienn, ur c'hevredad; un teul-strobad zo un teul-kred hirdermen, un dalvoudenn.
  - (4) Kevredad dre gevrannoù g. ls., kevredad kevalaoù (sl. (2) amañ diagent).
  - (5) Kilezel ag., (kv.: kile(z), egile) oc'h emplegañ ur c'heñver a geveskemm etre an izili : en ur gompagnunezh kretadur kilezel ez eo pep hini kretaer ha kretaed war un dro.



